

Bernlou lennerien a Gerne hag a Dreger a c'houlenn diganen sonion feñtus, da lakaat c'hoarz ha farz. N'oun ket evit rei gwelloc'h d'ê hirie eged eur zon gret gant Prosper Proux, mestr braz ar skrivagnerien brezonek, ken karet gant Tregeriz ha Kernewiz.

« An den Sammet pouner » a zo tennet euz « Kanaou-Ennou gret eur

c'hernevad » embannet e 1838. Mar gav unan bennag da zislaret diwar-benn ar zon-mañ pe zoken diwar-benn oberiou Prosper Proux, a ran outan dioustu eur spered siriz, bihan hag izel. Ouspenn-ze a lavarin d'ê sonjal maê el lavar Bro-Zaoz, eul lavar gallek :

« Houti soit qui mal y pense ».

TONTON PHILE.

AN DEN SAMMET POUNER

Be - a zo e - barz er ger - ma Eun den euz
 ma le - vrus sa Seiz leo tro dro ke - ment 've
 gret Holl war e chok ez int sam - met Na neuz ket
 War a le - ve - er Fal - lach bail - lon e vit Pros - per -

AN DEN SAMMET POUNER

Bea 'zo ebarz er gêr-ma
 Eun den euz ar malevrusa ;
 Seiz leo tro-dro kement 've gret,
 Holl war e chok ez int sammet
 Na neuz ket war a leyerer,
 Falloc'h haillon evit Prosper.

Ma weler eur c'hoef chifonet,
 Eur golineten difréget,
 Mar ve flastret eur bern kolo,
 Mar tillip eun êt dishano
 Raktal e lavar eur gomer :
 Piou a zo kaoz nemet Prosper ?

Mar teker elec'h war bod maê
 Eur vojen spern pe eun troad loê
 Mar ve droug en korf ar person
 Mar be moredu ar zerrmon
 E lavaro seurezet kêr :
 Piou a zo kaoz nemet Prosper ?

Mar n'er ken nemeur da govez,
 Na d'an oferen gwall aliez,
 Mar chanz da veur a blac'h riskla,
 Mar blij d'ar botred mont d'eva,
 Da Bask, ma ve kalz tapet berr,
 Piou a zo kaoz nemet Prosper ?

Mar n'euz meur a vamm nec'hamant
 Abalamour d'he merc'heñ koant
 Ma c'holo'nê gand ke askel
 'Vel ar yar pa wel ar sparfel,
 Daoust da ze mar o dibluer,
 Piou a zo kaoz nemet Prosper ?

Mar gweler, pez n'eo ket is hiz
 Meur a blac'hig koant diaviz
 O kemer dre wall blanedon
 Eon aêr evit euz zillen,
 Ma renk hirrat he davancher
 Piou a zo kaoz nemet Prosper ?

Mar tichanz da veur a baour kez
 Tentet gand ar briedelez,
 Santout 'noz kenta e eured
 Digoret frank dor ar gaoued
 Hag aet ar pabor gant al laer
 Piou a zo kaoz nemet Prosper ?

Mar gweler meur ozach lorc'hek
 O tougen ar boned forc'hez
 Ma ra kals er zakristiri
 Falz signaturiou hep pec'hi
 Mar neuz mab an tongn eur fri kaer
 Piou a zo kaoz nemet Prosper ?

Merc'heñ miguon, ha dizoursi,
 Pa chase d'ec'h mont en eun ti
 Mar be eno ar c'hliant-ze
 Sonjet skampa hag hep dale,
 Noe'h bikan en brassoc'h danjer
 Eged pa' z'och tost da Brospër.

En eur gir an holl doliou kaer
 A ve tamallet da Brospër
 Mar oe gwelet abenn kant vla
 An Antekrist o tispaka
 Raktal me bari e crifer
 Resusitet ez eo Prosper.

Prosper PROUX.